

TAOLENNOU AR MISSION

DISPLEGET

Gand ann Aotrou BALANANT, Beleg.

SALAUN, LEORIER E KEMPER

56, ru Kereon.



KEMPER

MOULLET E TI DE KERANGAL

Mouller an Eskobti.

Nous permettons d'imprimer le petit ouvrage qui a pour titre :
Taolennou ar Mission, et pour auteur M. L'ABBÉ BALANANT.

Quimper, ce 16 Novembre 1899.

F. CORRIGOU, Vic. capit.

EUR GER DIVAR-BENN AN TAOLENNOU

Eur Mission a zo unan euz ar grasou kaera oufe ann Aotrou Doue rei d'eur barrez. N'euz ket par d'eur Mission evit dihuna ar Feiz, santelât ar re just hag ober d'ar becherien distrei ouz Doue. Ann oll a oar ar vad great bete vremen enn hon Eskopti dre ar Missionou, rak diez e ve niveri ar re o deuz kavet enno ar peoc'h hag ann eüruzded.

Daoust a ne c'helfemp ket lavaret gant guirionez eo an taolennou o deuz great al loden vrasa euz al labour-ze ? Heb'an taolennou hiviziken n'euz Mission talvouduz ebet ; hag eaz eo gouzout penaoz e teu an taolennou a-benn da ober kement-se a vad. Mont a reont dre zaoulagad an den beteg he spered, hag evelse, ar guirioneziou merket enno a jom-skrivet donno'h enn he benn hag enn he galoun.

Karout a rafemp eta e c'helfe an taolennou chom atao dirak daoulagad an dud evit digas da zont d'ezho euz ar Mission. Setu perag on euz great al leorik-man, ha displeget ennan pep taolen, e berr gomzou.

An taolennou n'int ket traou nevez. Great int bet ha displeget da genta gant Mikel Le Nobletz, ganet e Plougerne, e Leoun, an 29 a viz Guengolo 1577, ha maro evel eur zant e Konk Leoun d'ann oad a 75 vloaz.

Implijet int bet abaoe gant kalz missionerien, hag atao o deuz great vad d'ann eneo.

En darn-unia euz an taolennou ne velomp nemed eur penn hag eur galoun. Ar re-man a verk an diou loden a zo en den : ar c'horf hag ann ene. Dioc'h pehini anezho e vez great brasa stad ? An taolennou a lavaro d'ann oll var gement-man ar virionez hep damanti.

Ar pec'hed marvel.



Eunn ene e stad a bec'hed marvel.

Setu aman eun den e stad a bec'hed marvel. Ne glask nemed he blijadur ha kement tra c'helfe maga he ioulou fall. Eur zell outhan a zo awalc'h evit guelet n'eo ket sonj ann Aotrou Doue 'zo enn he benn. Touellet eo he spered gand ar bed ; stad a ra euz he gorf, kement tra a c'houlou a ro d'ezhan.

Ha sonjal a ra ive enn he ene ? Siouaz ! guelit pegen truezuz eo doare he ene paour ! Lagad ar goustians a zo du ha tenval : karout a rafe mouga-mouez he goustians. Stereden ar Feiz ne lugern tamm : n'eo ket souezuz ! Ar Feiz, evit beza birvidik, a rank beza maget gand ann oberou mad. Hogen, petra velomp er galoun-man ? E kreiz, e ma an diaoul enn he za, hag en dro d'ezhan he vignouned brasa. Ar pañn a verk ann Ourgouil ; an tousek, ann Avaristed ; ar bouc'h, al Luxur ; ann aër-viber, ann Avi ; ar penmoc'h, ar Gourmandiz ; al leon, ar Goler ; ar velfeden, an Diegi. Kement tech fall zo a gav digemer mad e kaloun heman.

Penaos eo kouezet enn eur stad ker spountuz ? Sellit e traon an daolen ; petra velit ? Eur millouer, kartou, gwer ha boutaillou, eur biniou..... Kollet eo bet gand al lorc'h, ar c'hoariou, ann hostalirioù hag an dansou.

Daoust hag ann Aotrou Doue a vezo c'hoaz mad awalc'h evit ober eur zell a drugarez ouz eunn ene ken kaillaret ? Ia ; he Eal gardian a zo var he zaoulin o pedi evithan ; ar Spered-Santel dindan furm eur goulm a dosta ive evit skuilla varnhan he c'hrasou, merket dre ann elvennou a veler o nijal en dro d'ar galoun, hep kaout digor.

Pec'her diskiant, skouarn vouzar a rez breman ; diouall da skuiza trugarez ann Aotrou Doue, enn eur ober evelse fae var he c'hrasou ; rag a-bred pe zivezad ar Barner en devezo he dro !



Eunn ene o tistrei ouz Doue dre spount rag ar maro
ha rag ar varn.

EIL TAOLEN

Ann Atrision.

Ar plac'h-man a ioa touellet he fenn deac'h gant follenteziou ar bed ; he c'haloun a ioa trec'het gand he ioulou fall ha saotret gand ar pec'hed. Hirio e deuz c'hoant chench buez. He fenn a zo modest, he daoulagad soublet ; var he bizaj e veler eun dristidigez vraz. Al loened a dro kein evel pa vent o vont kuit ; an diaoul ive a zo eun troad d'ezhan er meaz euz ar galoun, tec'het a ra, en eur skrigna he zent. Evit doare, ez euz en em gavet aman eun dra benag ha ne blij ket kalz d'ezhan. Ann Eal gardian a zo ganthan, enn eun dourn, eur penn maro, hag, en dourn-all, eur c'hleze lugernuz. E traon an daolen, ez euz eunn aneval hag a daol tan leiz he c'hinou. An traou-man a verk ar Maro, ar Varn hag ann Ifern.

An Eal gardian, dre drugarez evit ar plac'h-man, a deu da zigas sonj d'ezhi euz he finvezioù diveza. Ma teu ar maro d'he skei, eun Doue just he barno hag he stlapo enn ifern ! Hou-man, daoust a ma'z eo brein he c'haloun gand ar pec'hed, a zelaou mouez he Eal gardian. Al lagad a zo anter-glozet : disken a ra e gweled he c'houstians. Ar stereden a zo skleroc'h ar Feiz a zihun hag a ziskouez d'ezhi ann ifern digor dindan he zreid. Neuze e sao spount enn he c'haloun, hag e lavar : « Ne ma-oun ket var ann hent mad, distrei a rankan ! »

Ar c'hartou, ar gwer hag ar voutail a ruill d'an douar : dilezel a rai brema kement tra 'zo bet evithi penn-abek da bec'hi. Ar Spered-Santel a dosta muioc'h-mui ; eun neubeud grasou a zo dija ebarz ar galoun ; ne zaleint ket da zougen frouez. Kouls-goude, evit ober d'an diaoul diskregi da vad, ne vezo ket awalc'h d'ezhi kaout aoun, red 'vezo ouspenn kovez.

Ar gwir Gontrision.

Ar bec'herez-man, distro divar ann hent fall, a zo mall ganthi en em zizamma euz pouez pounner ar pec'hed. Mont a ra da govez, ha goudeze e lavar outhi he-unan : « Breman va zonzj a zo great : adaleg hirio, me reno eur vuez nevez. *Dixi, nunc coepi...* »

Ann Eal gardian, laouen hag eüruz o velet eo troet ker mad breman he c'haloun, a beur-c'hraio al labour. Diskouez a ra d'ezhi eul leor hag eur grusifi. El leor, e vel-merket he buez a-bez abaoe m'eo deuet he skiant d'ezhi : he ene zo goloet a bep seurt pec'hejou ; stankoc'h int eget al louzeier fall enn eur park. Galvet 'oa da gemer perz e joa hag eürusded ann Eny, mes-siouaz ! roet e deüz ar maro d'he ene. Keit a ma vije chomet er stad-se, Baradoz ebet da c'hortoz ! Ann ifern, gand he boaniou skrijuz, a vije bet he loden evit ann eternite !

Var ar grusifi, e lenn ar garantez dispar en deuz bet ann Aotrou Doue evithi. Euz ar penn beteg an troad, korf Jezuz n'eo nemed eur gouli : ar c'hig zo eat gand ar fouetou ; ann eskern zo dizolo..... skrijuz eo sellet outhan !


Evel ma teu ann heol da deuzi ar skourn, evelse ive karantez Hor Zalver-a deu da denerât kaloun ar plac'h-man. Daelou 'zo enn he daoulagad, ha daelou kaeroc'h c'hoaz enn he c'haloun. Gouzout mad a ra breman-eo hi e deuz staget Jezuz-Krist ouz ar Groaz ha dispennet he gorf santel. « Pardoun, va Jezuz, emez'hi, pardoun !... Va zikourit da viret a-vreman dioc'h ar pec'hed ha da ober eur gwir binijen. »

Kerkent a m'e deuz bet ann absolver, an diaoulou a dec'h kuit. Ar Spered-Santel, gand he c'hrasou, a zisken enn he c'haloun ; ar Feiz a zo sklereat, ar goustians a zo sioul ; var evez e ma koulsgoude, rak koumoul an tentasionou a veler o sevel.



Eunn ene distroet ouz Doue enn eur velet ar boan
a ra d'ezhan ar pec'hed.

Ar Binijen.



Eunn ene e gras Doue oc'h ober pinijen.

Daou rumm dud hebken a ia d'ar Baradoz : ar re o deuz dal-c'het ho c'haloun neat a bep pech'ed marvel adaleg ho badiziant, hag ar re a ra pinijen goude beza pech'et.

Rouez int, ann eneoù santel a c'hounid ho c'hurunen dre eur vuez dibec'h ; stank avad, ha stank braz zoken, ar re a ia d'ar Baradoz dre hent ar Binijen : an den-mian a zo unan anezho. Bet eo, epad pell amzer, eur pech'ed diroll, hag eun devez, grâs Doue e deuz digoret d'ezhan he zaoulagad ; distroet eo a galoun vad, pardounet eo bet. Breman n'en deuz ken c'hoant nemed paea da Zoue an dle stag ouz he bec'hejou, evit mont buanoc'h d'ar Baradoz.

Er galoun-man e veler Jezuz-Krist var ar groaz hag oll binvia-chou ar Bassion : ar zonz eur poaniou Hor Zalver, renevezet ganthan ken aliez a vech, dre he bec'hejou, a laka d'elou enn he zaoulagad ha zoken enn he galoun.

Mes, netra semploc'h eget eunn ene nevez distroet ouz Doue : henvel eo ouz eur c'houlouen a zo o paouez beza mouget, hag a grog buan ar flamm enni. He-man 'oar eo bresk evel eur gorzen, hag a ro d'he ene eur vagadurez iac'h ha nerzuz merket aman e traon an daolen :

Eur chapeled : pedi 'raio mintin ha noz ; devot 'vezo d'ar Ver'hez.

Eul leor : ann Aviel, Imitasion Jezuz-Krist, Buez ar Zent.

Eun dourn digor : aluzen a raio ervez he zanvez.

Eur pesk : d'erc'hel mad a raio breman d'ar iun ha d'ar vijil.

Eur skourjez : kastiza 'raio he gorf evit ober d'ezhan plega d'ann ene.

Eunn iliz : ne vanko morse d'ann oferen ; mont a raio d'ar gousperou ha da oll ofisou ann Iliz.

Eur ster : gwalc'hi 'raio aliez he ene e dour santel ar Binijen.

Eur groaz enn eur c'hornik distro : en em denna 'raio, eur vech ann amzer, pell dioc'h trouz ar bed evit sonjal da vad enn he zilvidigez. Ma kendalc'h var ann hent-se, ann Eal a ziskouez d'ezhan ar Baradoz digor d'en digemeret.

Ann ene o tistrei d'ar pec'hed.



Eunn ene o tilezel he zeveriou hag o rei digor a-nevez
d'an droug-sperejou.

Er Mision-man, ervez ma lavar ar c'hantik, e kafot oll ar peoc'h hag ann eüruzded; iac'h ha laouen 'vezo-hoc'h ene. Pegeit e chomoc'h e gras Doue? Pelloc'h, me gred, eget ar plac'h a zo aman. Rodellet eo he bleo ganthi, eur gelc'hen berlez a zo en dro d'he gouzouk, c'hoarzin a ra : eun tammik fouge 'zo savet ennhï adarre. Karout a rafe breman ranna he c'haloun etre Doue hag ar bed.

Setu perag e velomp eul lagad d'ezhi serret kloz var gement a zell ouz he silvidigez, hag egile digor frank, ha troet varzu ar blijadur. Ebarz ar galoun, Jesus-Krist ne ma mui var ar groaz, meur a dra a vank c'hoaz euz binviachou ar Basion, hag ar pez a jom a vëzo mouget dizale gant moged an tentasionou.

A neubeudou e deuz ankounac'heat he Mission, ha dilezet he oberou a binijen. N'eo ket estoun e ve toc'hor he feiz, hag he c'houstians evel dall. Dizonjet e deuz ali mad ar Spered-Santel : « *Qui spernit modica paulatim decidet*, Ann hini a zisprij an traou dister, a gouezo neubeud a neubeud. »

Ann Eal gardian, eun dourn d'ezhan var ar galoun, a sko a gleiz hag a zeou evel pa ve kounnaret. Leac'h 'zo ; guelit ann oll loened distroet aman, eun diaoul gant peb hini anezho. An droug-spered, kaset kuit epad ar Mission, a zo eat da glask seiz diaoul all krenvoc'h egethan. E maint aman-var bôrdik ar galoun, ha koulsgonde ar plac'h-man ne ra van.

Eur bourc'hiz a velomp o sank a eur c'hleze enn he c'haloun, hag en tu all eur pez divalo o c'houlou digor ive. Ar re-man 'ioa bet penn-abek d'ezhi da goueza araog ar Mission ! Ma ne daol evez, hep dale e ma paket adarre enn ho rouejou, hag e vezo diesoc'h d'ezhi, en taol-man, en em denna kuit; rak seul-vui ma raiô faë var grasou ar Spered-Santel, seul-dounoc'h e ielo ar pec'hed enn he c'haloun.

Penaoz e kouezer adarre er pec'hed.

Eur zoudard armet mad a zalc'ho penn d'he enebour ; ma lez a gostez he armou, e ma kollet. Setu petra en deuz great an denman. Goude eur Mission euz ar re vella, eo peget an diegi ennan ; dilezet en deuz a-nevez he zeveuriou kristen. A volonteiz vad eo eat var hent riskluz ar pec'hed ; ne zaleo ket da gaout eur gwall lamm.

Renket brao eo he vleo ganthan, ha tronset he voustachou : ne zonj adarre nemed er blijadur hag e follenteziou ar bed. E traon an daolen, e veler eur millouer, kartou ha dizou, eur voutail ha gwer, eur biniou : allaz ! heuliet en deuz kompagnunez fall, distroet eo d'ar c'hoariou, d'ann hostaliri ha d'an dansou !

Eul leor a zo ive, merket varnhan eur ger gallek « roman », da lavaret eo, leor brein. Dindan al leor, ez euz eun neubeud paper : kazetennoù fall, marvad ! Breman ne vag mui he spered nemed gant louzdoni er giz-se. Beza z'euz ouzpenh eur maskl : c'hoant en defe da guzet he droioù ha da dremen evit eur c'hristen mad.

Ha koulsgoude, pegen trist eo stad he ene ! An diaoul a zo azezet breman enn he galoun, evel eur roue var he drôn : en dro d'ezhan, he vevellien a zo dizoursi : er gear e maint. « *Fiunt novissima pejora prioribus*. Kouezet eo ar pec'her izeloc'h eget biskoaz, » dre m'en deuz great fae var grasou ar Mission. Stereden ar feiz a zo du-pod, lagad ar goustians a zo evel maro : dre he wall-vuez en deuz mouget he feiz hag he goustians. He Eal gardian koulsgoude a bed evithan, ar Spered-Santel a jom c'hoaz enn he gichen da ginnig d'ezhan ar pardoun, ma kar distrei. Siouaz ! dallet neat eo gand ar pec'hed : ne zelaou na mignoun, na tad, na mamm, na beleg, na Done !... Ma varv er stad-se, n'en deuz nemed ifern da c'hortoz !!



Eunn ene kouezet a-nevez er pec'hed marvel dre m'en deuz dilezet he zeveuriou kristen.

Maro' ar pec'her.



Eun den skoet gand ar maro e stad a bec'hed marvel.

Trugarez ann Aotrou Doue a zo braz meurbed, eun termen e deuz koulsgoude. Hor Zalver he-unan eo hen lavar d'eomp : « *Quæretis me et non inveniétis, et in peccato moriemini* : Va c'hask a reot ha n'am c'hafot ket, hag e rankoc'h mervel enn ho pec'hed. » Ar c'homzou-man a zo deuet da vir evit an den a zo aman gourvezet var he vele.

Skouarn vouzar en deuz great da vouez trugarezuz Hor Zalver, disprijet en deuz he vadelez ! Setu deuet breman tro ann Aotrou Doue. Ar maro a sko ar pec'her, aliez siouaz ! pa zonjan neubeuta. Aman, var an daol ez euz kartou, eur voutail hag eur veren : *In peccato moriemini* : Mervel a raio e kreiz he blijadur. A zioc'h he vele, eun diaoul a zigor frank leor he vuez dirag he zaoulagad : penaoz lakât urz enn eur goustians ken zammét ? Biken ne c'hello ; re zivezad eo !

En dro d'ezhan ne jom nemed diaoulou hag amprevaned vil. He Eal mad a dro kein enn eur vouela : he leor d'ezhan a zo goullo ! M'en deuz great an den-man eun dra vad benag epad he vuez, en deuz siouaz ! kollet he oll veritou dre ar pec'hed marvel. Mervel a ra en dizesper, ha var he vele, raktal e vezo barnet. « Kea, ene milliget, eme Hor Zalver, kea d'an tan eternal ! »

E traon an daolen, eo merket petra eo bet an den-man gullet a reomp, 1° eur bluen : skrivet en deuz leoriou, kazetennou, gwerziou fall, hag a bouez breman var he goustians ; 2° dizou : n'en em blije nemed er c'hoariou ; 3° eur c'helze : roet en deuz taol ar maro da veur a ene dre he skridou, he gomzou lor, hag he vuez diroll ; eur maskl : e kuz marteze en deuz great he droiou ; troumplet en deuz an dud, ne droumplô ket ann Aotrou Doue, a lenn difazi e gweled ar goustians.

Pebeuz samm da vont dirag he Varner !



Eunn ene barnet ha stlapet enn Ifern.

Ar Varn hag ann Ifern.

Setu maro ar pec'her e kreiz he vuez direiz : kerkent eo bet barnet. Petra n'euz douget ganthan dirag ar Barner ? He oberou, ha netra ken. Ha pe seurt oberou ? Pec'hejou, pe oberou great e stad a bec'hed hag heb talvoudegez dirak Doue.

El laez an daolen, ez euz eunn eal, eur valans ganthan enn he zourn ; a bep tu d'ezhan, eunn eal-all o tispaka eur rollad paper. Buez ar pec'her, merket aman, a zo pouezet e balans ar Varn : re skanv eo kavet. He Eal mad, glac'haret-oll, a rank lavaret d'ezhan kenavo evit ato, ha derc'hel ganthan ar gurunen a dlie lakât var he benn. Barnet eo da viken !


Kerkent eunn Eal, gand he gleze lugernuz, a gas anezhan kuit, hag an diaoul a lamm varnhan evel eur bleiz kounnaret. « Kenavo Salver benñiget, kenavo Guerc'hez Vari, kenavo oll zent ha sentezed, kenavo baradoz dudiuz !... me ne c'hellin biken ho kwelet ! »

Disken a ra enn ifern, e kreiz eur mor tan. Bourrevet eo ann oll skianchou en deuz pec'hed gantho : he zaoulagad, he c'hinou, he ziskouarn. En dro d'ezhan diaoulou, aëret, amprevanet euz ar re lousa ; he vele 'zo glaou beo, he vagadurez flammou.

Karet a rafe distrei var an douar da ober pinijen..., re zivezad ! Doriou ann ifern, serret varnhan, ne zigorint biken !...

Sonjit aliez enn ifern. Ne c'hortozit ket heur ho maro evit distrei ouz Doue. Epad ar Mission-man, gwalc'hit mad hoc'h ene. Breman eo d'eoc'h teuler evez, gand aoun na deufe ann Aotrou Doue da skuiza ganeoc'h.

Hent ar Zilvidigez.



An daou hent digor dirag pep kristen : hent ar Baradoz
hag hent ann Ifern.

An daolen-man a ziskouez d'eomp ann hent en deuz heuliet
an den daonet, or beuz gueleit en ifern.

Aman ez euz eur menez huel hag eur groaz lugernuz azioc'h
d'ezhan. Ar menez-man a verk buez an den o vale etrezek ann
Eternite. Ar vuez a zo eur veach hir evit lod, berr evit lod-all :
ne c'heller eana nemied e penn ann hent.

Daou hent a zo digor dirazomp : hent ann Ifern hag hent ar
Baradoz. Hent ann Ifern, frank, ledan, kempennet kaër : a bep
seurt tud a vale dreizhan : enn eun tu. eur bourc'hiz, en tu all,
eur c'houeriad. Ne zaleint ket da gaout lamm, rag an diaoul a
veler ouz ho gortoz. Hent ar Baradoz, striz, rust, goloet a zrez
hag a spern : gwir eo komz hor Zalver : « *Regnum cœlorum vim
patitur, et violenti rapiunt illud*, Rouantelez ann Env a vezo roet
d'ar re a boanio stard hag a vezo dizamant ouz ho c'horf. » Kouls-
goude mar d'eo moan da genta, goude-ze e teu da ledanât. Ia, ar
pec'her nevez distroet ouz Doue a gav diez da genta heulia he
c'hourc'hemennou ; mes eur zell var ar groaz a ro d'ezhan nerz-
kaloun, gras Doue a skanva ar zamm « *Jugum meum suave est et
onus meum leve* ».

An teir vaouez 'zo e traon an daolen n'o deuz ket great ho
zonj c'hoaz ; pe, da vihana, eun dra benag a vir outho da gemeret
hent ar Baradoz ; re stag eo ho c'haloun ouz traou ar bed, ha n'o
deuz ket a nerz awalc'h evit terri liammou ar pec'hed.

Eun den a velomp o pignat : bolontez vad en deuz, sellet a
ra eeun dirazhan. Hueloc'h, eunn itron, goude beza great eur
pennadik hent, a deu da fall-galouni pa vel dirazhi pazennou ar
zantelez.

Unan all, en em gavet e penn he beac'h, a zo var he daoulin
dirag ar groaz. Rust eo bet, ann hent, n'euz forz ! hent ar C'halvar
a zo ive hent ar Baradoz !



Eunn ene o_kenderc'hel var ann hent mad

Penaoz kendere'hel var hent ar baradoz.

« An hini a gendalc'ho var ann hent mad betek ar maro a vezo salvet. » — Setu aze ar c'homzou a lennomp var ar rollad paper a zispleg ann Eal dirak daoulagad ar plac'h-man. Abaoue he Mission, hou-man e deuz kemeret evit mad hent ar Baradoz. Skuizder, poan, pinijen, netra ne ra aoun d'ezhi. Gouzout mad a ra e tosta bemdez termen he beach, ha setu perag eo stankoc'h c'hoaz he oberou mad ha rustoc'h he finijen.

Er bevare taolen, ann oberou a binijen a zo e meaz ar galoun : aman e maint ebarz. Ia, dere'hel a ra startoc'h d'ezho, rak gwelet a ra n'euz netra koulz-hag ar binijen evit pellat an dentasion ha rei nerz d'ar galoun.

Ar goustians 'zo digor frank he lagad : direbech eo, ar peoc'h zo ennh. Ar stereden a zo lugernuz : ar Feiz, breman maget gant kement-all a oberou mad, a zo beo-buezeg. Hou-man a ra aliez Actou a Feiz. Ar grusifi a zo e kreiz he c'haloun : Her Zalver Jezuz-Krist eo ar mestr aman, hag aliez hed an deiz, e vezo test euz he c'harantez birvidik.

Eun dra 'zo aman n'or beuz ket gwelet c'hoaz : eunn aoter ; mont a raio aliez da c'houlén sikour digant Jezuz ebarz ar gomunion ; d'ann oferen ne vanko morse mui, var ar zizun zoken, ma chom amzer ganthi.

Mevellien an diaoul o defe c'hoant da zével ho fri c'hoaz varzu ar galoun-man, mes ho mestr, o tec'het kuit gand he forc'h hag he hual, a c'halv anezho var he lerc'h : « Deomp d'ar gear, emezhan, aman n'or beuz netra ken da ober, koll a reomp hon amzer ! »



Eunn ene e stad a c'hras galvet da vont d'ar Baradoz.

Maro eur Zant.


E ma digouezet an den just e penn he veach. Poaniet en deuz stard da c'hounid he gurunen, pinijen en deuz great d'he bec'hejou : Doue breman 'zo o vont d'en digoll. Astennet eo var he vele diveza, eur sklerijen gaer a zisken euz ann Env var he dal, hag a zigas beteg ennhan evel eur skeuden euz ann eüruzded 'zo ouz he c'hortoz.

Var an daol, e kichen he vele, ez euz eur groaz ha diou c'houlaouen benniget. Ar belek a ro d'ezhan sakramant an Nouen, ha dre ma ra sin ar groaz gand ann oleo zakr var he skianchou, ann Eal-mad a ro eun taol pluen var gement pec'hed a c'helfe beza great, dre zempladurez, epad he vuez.

Sant Mikel, gand he gleze, a gas kuit an diaoul ; aman n'euz netra evithan : distrei a ranko d'an ifern gand he leor goullou hag ann eteo a vez ganthan o c'houeza tan ar pec'hed er c'halonou. Ar vugaligou, gant ho mamm, 'zo daoulinet etal ar gwele, hag an tad a zav he zourn evit rei dezho he vennoz diveza. Kimiada 'ra heb rann-galoun, rag Eal ar maro mad a ziskouez d'ezhan, ar baradoz digor a-zioc'h d'he benn. Ann Elez a nij en dro d'ezhan, mall gantho digemeret he ene evit hen dougen var ho diouaskell aour beteg tron ann Aotrou Doue.

Sant Per, alc'houez ar Baradoz enn he zourn, a ziskouez d'ezhan ar plas 'zo merket evithan e palez an Dreindet ; eno e vezo eüruz da viken, o kana meuleudi da Zoue.

Ra zeuio an daolen-man da lakât esperans e kalonou ar bec'herien, o deuz great ho Mission. Doue, epad an devezioù santel-man, en deuz roet eun taol pluen var ho buez tremenet : d'ezho breman da boania evit gounid kurunen ar zent.



Ann eneoù oc'h ober pinijen e tân ar Purkator.

Ar Purkator.

A c'hoant o c'heuz-hu da vont d'ar Baradoz var eeun ? Grit pinijen hervez an niver euz ho pec'hiejoù. Rak, goude, ann absolver e chom c'hoaz dle da baea da justis Doue, pe var an douar, pe er purkator dre boaniou krisoc'h. Setu ar pezh a verk an daolen-man.

Gwelet a reomp aman, enn eur pùns leun a dan, kalz a dud n'int ket diskarg awalc'h c'hoaz evit mont d'ar Baradoz. Ann Elez a zisken beteg enno : kas a reont gantho ar re o deuz peure'hreat ho finijen, hag ar re o deuz tud vad var an douar da bedi evitho, da ziverrât ho foaniou dre ann oferennoù hag ar zervichou a lakont evitho. Hor Zalver Jezuz-Krist, azezet var eun tron kaer, a zo gantho eur gurunenn enn he zourh. En tu kleiz d'ezhan, e ma ar Verc'hez Vari, digor he divreac'h evit digemeret he bugale. Enn ho c'hichen, ann Elez a gan kantikou ar Baradoz. En tu deou, e velomp daou zen koz hag eur bugelik iaouank. An tad koz hag ar vam goz n'int ket chomet pell e tan ar Purgator. Lezet o deuz-var ho lerc'h, evit doare, bugale vad hag o deuz pedet evitho ; rag e maint breman er Baradoz.

Ar bugelik-man a zo eun elik bihan, bet skoet gand ar maro araok beza saotret sae venn he vadiziant. Gwelet a ra he vamm erru d'ar Baradoz : pebeuz joa evithan ! Pebeuz laouenedigez ive evit ar vamm, pa c'hell bremaik starda var he c'haloun he elik muia karet, e devoa skuillet kement a zaelou varnhan !

Araok ma vezo klozet ar Mission, kasit, en han' Doue, an tanva euz ar grasou o peuz resevet beteg eneoù karet ho tud, zo c'hoaz marteze e tan ar Purkator.

Truez ouz ann Anaoun, evit ma vezo truez ouzomp ive goude hor maro !